

## Barzhonegoù Akrostich

"Selaouit ar c'heloù trist ha frealzus :  
Hini bet war an douar,  
Na kog ar beure nag eostig an noz  
N'o deus tout a fed ar c'han  
A huvrefent reiñ da glevet"

Edmond Rostand

Bremañ evel gwechall  
Ra gendalc'ho hep spered fall  
Entanet gant al levenez  
'zo plijadur pep devezh  
Hor pal hag hon abeg  
Oc'h awenañ pep hini da brezeg brezhoneg  
Nadoz vor hol levenez  
Ene hor buhez  
Giz m'eo pouezus e yezh evit pep hini

Bleizi 4re Gwenn

Brezhoneg yezh ar skolaj  
Ra bado ar veaj  
El lise ha pa vimp bras  
Zoken pa veajimp er spas  
Hor yezh hon eñvorennoù  
Oc'h ober tro ar bed  
Ne vezint ket disteraet !  
Evel un ael pe un aerouant  
'Gresko da viken gant entan

Bleizi 4re Gwenn

Bugale o komz galleg  
Ret eo deomp komz brezhoneg  
Skolajidi Plijidi omp  
Zoken pa c'hoariomp  
Hor yezh deomp ar brezhoneg  
O yezh dezho eo ivez  
Ni a zo bet entanet  
Grit strivoù evit ar brezhoneg

Yoran

Brezhoneg eo va yezh  
Ret eo din komz e Breizh  
Evel m'en doa graet va zad  
Zoken vit lavaret gerioù aezet

Heureuchin a vo mat  
Ober ur boelladenn mat  
N'eo ket fentus kenañ  
Evit va bro karetañ  
Graet e vo tout ar pezh 'zo ret !

Yoran

Brezhoneg yezh ar vro  
Red eo komz anezhañ  
Er skol e vez desket  
Zoken ma n'eo ket aes  
huchal e pep lec'h  
o tiskouez al loc'h 'zo ennomp  
n'eo ket ur yezh varv  
Estreget ma rofemp peoc'h  
Gantañ e vo desket c'hoazh !

Yoran

Brezhoneg, ur yezh vev !  
Reolenn evit ar vretoned  
Erminig o redek a-us  
Zoken a-us Sant-Brieg  
Heol en ur bed digredus  
O nijal oa ul labous ur pesk en e veg  
Naon en doa an naer burzhudus  
E tren Sant Brieg ur vro alaouret  
Gwechall moa klevet loened komz brezhoneg

Nina

Brezhoneg a zo yezh Breizh  
Arabat leuskel plas d'ar galleg  
Evit ar galleg  
Zoken evit yezhoù all  
Ha ! Bras eo ar plas  
Owan a zo bihanoc'h  
Neuze marplij ganeoc'h  
Emañ o tapout ur plas bihan  
Gwelit ar yezh vravañ : Brezhoneg

Alix

Breizh eo ma c'havel  
Ral oan 'oa ket pell  
E Breizh vez komzet  
Zoken e pavar c'horn ar bed  
Hadet eo bet a barfeted  
O tiwanañ emañ bremañ  
Ne vo ket disoñjet  
Emañ o kreskiñ en-dro

Glad va bro eo hag e chomo.

Baptiste

Brezhoneg eo hor yezh  
Re a dud a gomz hor yezh  
Er vro-mañ e Breizh  
Zoken ma za diwar wel  
Hon eus ur yezh buhezeg  
Offener ar brezhoneg  
N'eo ket ta gouzout gerioù  
Emañ poent komz asambles  
Gwelet e vo ez eo ur yezh vrav

Baptiste

Breizh a zo ur vro kalz  
Re bouezus evidon  
Evit bezañ plijet  
Zoken gant ar brezhoneg  
Heol e bep lec'h  
Oc'h ober surf en aodoù  
N'ez eus ket tud drouk  
E Breizh emañ n'eo  
Gwarezit breizh mar-plij.

Apolline

Brezhoneg yezh ma bro  
Ret eo mont d'an distro  
Evit komz en hor zi  
Zoken e Plijidi  
Heol zo en hom bro  
O yezh brav tost marv  
Nag a draoù da c'houzout  
En hor yezh ez eus tout  
Gant hor yezh : Brezhoneg.

Riwall

Brezhoneg a zeskomp, gantañ e kreskomp  
Reiñ ar yezh d'an holl, n'hon eus ket c'hoant da goll  
E-pad vugaleaj e vevomp, e-pad an oad gour e teskomp  
Zoken gant an alkol ez eus tu da chom a-stroll  
Heol en hor penn, karantez en hor c'hroc'henn  
Orin ar vretonek betek penn ar bed  
Nozvezhioù hep boemen o sellet ouzh an amzer o tremen  
Er vro gant mignoned eus Brest betek Naoned  
Ganit e vez eskemmet, trugarez brezhoneg

Moïra

Brezhoneg e pep lec'h

Ret eo chom er gêr  
Evel kalz kizhier  
Zoken 'barzh ma c'haier  
Heol zo war da lec'h  
O tapout da amzer  
Nag ur pezh kelener  
E Breizh e vi er gêr  
Gant da spered na kaer !

#### Cheun

Bezh ar gerioù brav  
Rouaned ar yezh  
Eñvor ur bern traoù  
Zoken war an traez  
Huñvre ar pokoù  
Orjal al lennegezh  
Noaz ar beajoù  
Eured yezh brav Breizh  
Gouli ar marv

#### Awen

Brav e c'herioù  
Red ar sterioù  
Emaoc'h rediet da strivañ  
Zero e lennegezh  
Hag e skritur ivez  
O peus ma n'eo ket doujet outañ  
N'o peus ket klevet ?  
E galleg vez troet  
Galleg gwech ebet

#### Ronan

Bremañ e vo graet  
Romantoù e leizh  
Eskemmoù c'hwitet  
Zoken ma 'z eo reizh  
Heol war ar bed  
O plantañ reuz  
Nomp ket rediet  
Er Skol aon peus  
Gwir vel brezhoneg

#### Maodez

Brezhoneg karet kenañ  
Rediet on komz anezhañ  
Er bed ez eo ar yezh

Zo an hini aesañ  
Hor yezh eo se zo ar pezh  
hOn eus an teñzor karetañ  
Neblec'h eus Plijidi  
E vez komzet anezhi  
Gant ar c'hi ivez en va zi

Youn

Brezhoneg a ganan  
Ranvro breizh ket ur vro  
E Breizh ken brav e kavomp  
Zoken pa leñvomp :  
Hep brezhoneg Breizh ebet  
O kanañ gant ar beleg  
Netra gwelloc'h evitañ  
Echuet va oant  
Gwir evel brezhoneg

Erin

Bet on bet er bistro  
Re a barizianed a zo  
Emaomp eus ar vro  
Zoken war an dreazenn  
Ho ! debriñ alumenn  
Oh ! N'o doa ket amann  
N'eo ket ur restaurant !  
E Breizh se 'zo chifus  
Gwelout an dra-se 'zo entanus

??